

Tud ar vro - Bro Leon
Roll kanaouennoù - Dañs a-benn

An durzhunell

Kalz amzer am eus kollet o furchal er c'hoajoù
Klask surpronn an durzhunell kousket war ar brankoù

Skoaziet e m'eus va fuzuilh met tennet am eus fall
Tec'het eo an durzhunell ha nijet er c'hoad all

Diouzh an noz hag ar mintin e klevan al laboused
O kanañ o fredoniñ war beg ar gwez pignet

Met n'eus nikun anezho a bikfe din va c'halon
Evel mouezh an durzhunell o ouelañ d'he mignon

Hirvoudiñ ra noz ha deiz gant ar boan an anken
'vel ur paour kaez intanvez kollet ganti he den

Hekleo he mouezh klemmus a red dre ar c'hoajoù
A zo meurbed poanius d'an holl labousedoù

Petra turzhunell yaouank a dourmant dit da c'halon
Kollet am eus emezi va fidelañ mignon

Ma na deu ar chaseour d'ober din me mervel
Me varvo gant ar glac'har d'am mignon koant fidel

N'eus na louzoù na souten na frealzidigezh
Gouest da bareañ souden gouli va c'harantez

Trec'het on gant ar glac'har mont a ran da vervel
Met ne varvin ket kontant ma ne varvan ket fidel

Gwelet am eus o vervel an durzhunell yaouank
Disec'het pizh he c'halon gant ar boan an tourmant

En he huanad diwezhañ he deus c'hoazh lavaret
Kenavo mignon fidel raktal eo tremenet